



## CHANSON AR FU MER E ZET.

*Var ton ar Parlament.*

**D**igassit din liou ha paper,  
Ma laqin eun eur vanden  
Bremâ souden var va c'hayer  
Ar merc'het hac o fiben ;  
Rac dies bras eo va speret ,  
O velet qement a verc'het  
Pere a zoug en o c'herc'hen  
Corn butun ha liassen.

Mes evel ma zeo danjerus  
Ur vaouz , pa ves fachet ,  
E c'houlennan ouzoc'h excus ,  
Merc'het , mar bezit choqet ;  
Rac bezit persuadet mat  
O pezo bremâ ur flippat  
Abalamour d'ho liassen ,  
D'ho putun ha d'ho piben.

Va c'halon a dounjeret  
O velet ar viltançou :

## 2

**Q**ement a zo ve sclabbez  
**P**a fumont o c'horniadou ;  
**H**a pa vezont ec'h oza'r yot ,  
**N**a vanq qet sur da gaout e lot ,  
**R**ac neuze' vezont e trein vat  
**D**a sumi ur c'horniedat .

**M**e a zo avis deoc'h , merc'het ,  
**D**a ober brinidennou

**E**vit laqat var ho pruchet  
**E** plac ho mouchouerou .

**Q**ementse ne gotusto qet quer ,  
**E**n un devez ur c'hemener

**A** rayo meur a vriniden

**D**a blom glaouren ar biben .

**G**oaset , bezit ive difun

**D**a brepar' ho liassen ,

**D**a laqat an tamou butun

**A** guefot en ho souben ;

**R**ac m'en assur pred boued ebet

**N**e vezoz deoc'h-u preparet

**H**ep en devezo e loden

**E**us ar sustanç ar biben .

**P**a zit en un tu da bournmen ,

**N**e ve qet drouc ho quelet

**O** tispaqa ho liassen

## 3

Da rei d'ho commerezet.  
 Va c'hommer, laqit ur c'horniat,  
 Ar vech-mâ e meus butun mat :  
 Pa vezò ar vlaguen gollo ,  
 An ozac'h a bournzezo.

Goude fumi , peur liessa ,  
 E clêvàn e ve sec'het ;  
 Neuze n'em leqeont da lonqa  
 Dour evel touliou göet.  
 Ne qet soues bras o guelet  
 Gant hidropisi decedet :  
 Coulz e ve dezo eva the ,  
 Pe guîn-ardant , pe gafe.

Mes ne zeus re-qeñ disqempen  
 Evel ar vaguerezet ;  
 Unan a zo eus ar vanden  
 E deus dêvet he bruchet.  
 Caér vezò deoc'h , bugaligou ,  
 Mar guellit serri ho qinou ,  
 Rac anez o pezo certen  
 Lod a sustanç ar biben.

Guelet merc'het a zo esquis  
 O fumi ur c'horniedat ;  
 Coulz eo ganén guelet ur vis  
 O neza ur gueyelat.

4

Un donjer eo guelet o min ,  
 Ha c'hoas e sonj d'an traou indign ,  
 Pa ve en o beg ur biben ,  
 E vezont merc'het qempen.

Goaset , pa zit eus ho qêriou ,  
 Ne vanqit qet da guzet  
 Ho putun hac ho pibennou ,  
 P'otramant e viot flippet ;  
 Rac . pa deuyo dê c'hoant fumi ,  
 Ne chommo corn abet en ty  
 Na vezoz furlogoteat  
 Evit caout ur c'horniedat.

Mar deus , hervez an decrejou ,  
 Commisseret er vro-mâ ,  
 Da gonta ar chiminalou ,  
 O deo labour da chiffra ;  
 Paqet viot , fumerezet ,  
 Rac ret eo , herves an décret ,  
 Paea divar peb chiminal  
 Tri scoët ha pêvar real.

Bremâ ive , merc'het yaouanq ,  
 M'o laqai er vreuriez ,  
 Rac ne veac'h qet sur contant  
 Ma n'o pe ho tijenes :  
 N'oc'h nemet plac'het divalo ,

## 5

Dismeganç , sablen , farç ar vro ;  
 Ha ma na guitait ar butun ,  
 Sur e collot ho fortun.

Mes ne deus re qen etourdi  
 Evel ar fumerezet ;  
 Qentoc'h eguet chom hep sumi ,  
 E zaent da glasq o bouet.  
 O ziez a vez dislogot ,  
 Rac n'o deus na bara , na yot ;  
 A boan vrás è dezo so qen  
 Gallout golo o c'hrroc'hen.

Servichererset , c'hui zo selêr ,  
 A ranco mont diarc'hen ;  
 Ho cajou a vezd dister  
 Evit bourra ar vlaguen.  
 Manifie e viot evelse ,  
 Scànyoc'h e viot da vale ;  
 Ha pa vezd lous an hentchou  
 Na gargot qet ho poutou.

Avoalc'h sur emeus caqetet  
 Ar merc'het hac o fiben ;  
 Ma na dint qet convertisset ,  
 Int goassoc'h eguet payen.  
 Rac se me ya da finissa ,  
 Ouc'h o lezel var guement-mâ :

## 6

**Selabuit attantivamant  
Va diveza complimant.**

**Esper e meus , fumereset ,  
Goude eur seurt prezeguen ,  
E vezo ho calon touchet  
Hac e reot pinijen.  
Laqit urz vad en ho tiez ,  
Ha chenchit pelloe'h a vuez ,  
Hac mar bezit re obstinet ,  
E viot excumunuguet.**

**Ac'hanta ta , fumereset ,  
Pean éch' eus en ho calon ,  
O velet quer brao qempennet  
Hoc'h histor hac ho chanson !  
Mes qemerit paciantet ,  
Calz c'hoas a ve da lavaret  
Evit echvi pen da ben  
An histor eus ar liben.**

**Ar chanson-mâ so composed  
Gant daeu ganfart disourci ;  
Evit exerci o speret  
O deus great anezi ;  
Ne qet dre intantion fall ,  
Mes seulement evit farçal  
Hac evit en em recrct :**

Merc'het, deut d'o fardoni.



CHANSON  
AR PLAC'HIC PAOUR HA FUR.

*Var ton Fantic Coant.*

Deiz mad dêc'h, Fantic Coant...  
Mes pebes chenchamant!  
Diveza m'ho quelis  
E voa fresq hoe'h invis;  
Mes abaoe, me gred,  
Noc'h eus-hi qet chenchet.

Joa vras ameus ouzoc'h,  
C'hoas em bije muioc'h,  
Ma yiye ho qenet  
Eun nebeut decoret  
Eus a metadurez....  
Pardonit, va mestrez.

Na ellân qet credi  
E ve dre ziegui;  
Qen nebeut supposi  
E ve dre loustonai  
O cuelan, plac'h yaouanqeo,